

Ur vennantez divrall

Meur a wezh e-korf ma respetad emañ bet goulennet genin da betra e servije « Mor Bihan Gwened tolpad » ?

Respont a rin neuze en deus un tolpad-kêrioù da bal kentañ tolpiñ ar c'humunioù evit kas da benn ar c'hefridioù bet fiziet ennoñ. Evit gober gwelloc'h c'hoazh asabl.

Mor Bihan Gwened tolpad a gas ar pal-se da benn get ar raktres tiriad bet savet e 2017, e deroù an tolpad-kêrioù nevez, hag a oa mat d'al lod bras ag an dilennidi.

Gouiet a-walc'h a reomp pegen toemm eo pep unan doc'h e gumun, ha n'eo ket drol rak ar gumun zo elfenn diazez hon demokratelezh, lec'h an nested, an darempredoù, ar servijoù.

N'emañ ket ar gumuniezh tolpad-kêrioù get ar mennad bout mestr àr ar re arall na rastellat kefridioù nevez diàr-goust ar c'humunioù enta. O seveniñ asabl evit bout efedusoc'h, ne lâran ket. Doc'h ar pezh a reket al Lezenn dimp emañ an dour hag ar yac'husaat e karg an tolpad-kêrioù abaoe ar 1añ a viz Genver. Tro hon eus kemeret ag ar chañchamant-se evit gober àr-dro mererezh hollek an dour, ag an dour-glav d'an dour a red doc'h hor c'hogou.

A-hed ar respetad-mañ hon eus dalc'het da striviñ evit gwellaat al liammoù etre ar 34 c'humun ag hon tiriad, ha labouret hon eus evit ma tay da benn paot mat a raktresoù hag a sell doc'himp-razh hag o deus graet berzh-kaer. Aprozerezh hon Brastres evit Kenstagded an Tiriad (BEKT) a ziskouez emañ trec'h mennantez an tolpad-kêrioù da aveiñ an tiriad en ur mod padus. Get ar BEKT, ha get ar steuñvoù evit an annez, ar monedone, an energiezh... hon eus savet



© J.F. Guillon

diazezoù hon diorroadur.

An 90 dilennad.ez-kumuniezh o deus laket bec'h ha kemeret perzh er pikol chanter-se evit sevel an tolpad-kêrioù nevez. Ar garg-se zo bet pounner-mat da sammiñ àr o c'hein hag o zrugarekaat a ran razh evit o strivoù hag al labour kaset da benn en hor 34 c'humun. Stad a c'hell bout enne evit al labour-stroll-se.

Evel-rezon e trugarekaan razh hon c'henlabourizion ivez.

An tolpad-kêrioù zo a-vremañ unan ag ar re a ro ar muiañ, pe marse an hini a ro ar muiañ a argant d'ar c'humunioù evit o raktresoù ivez, dre fontoù kenskoazell pe debarzhadurioù kenskoazell kumuniezhel.

An etrekumuniezh, evel ma ouit bremañ, a ya da greñvaat oberoù hon c'humunioù get an c'hoant da vout efedusoc'h.

Trugarez deoc'h-razh evit ho skoazell.

Bloavezh Mat 2020 !

**Pierre le Bodo,
Prezidant Mor Bihan Gwened Tolpad**